

Kevrat-labour a brantad-termenet

Mennad n° 1 : Aot*, It*, Dim* : **BREZHONEGER Yann** bet ganet d'an **25 12 1984**e : **Kêr Zudi (BZH)**

a vroadelezh : **c'hall** N nn gedskor : **1 84 12**

chomlec'h : **Hent an Ti-gar 56 000 PLOULIRZHIN**

a zo implijet evit kreizenn : **LIESSPORTOU** a vo dalc'het e : **Treglonou**

adalek **ar sadorn 02** a viz **Gouere** betek **ar yaou 14 a viz Gouere 2005**

Da lâret eo : **14** devezh en holl. O vezañ enno **1** devezh prientiñ, **11** devezh labourer, **1** devezh klozañ, hag **1** devezh diskuizh-ret.

Mennad n° 2 : Implijet e vo evel **Buhezour Dabu** evit ar prantad resisaet uheloc'h nemetken. Heuliet e vo spis stagadenn II Kevrat Hollek ar Buheziñ. (Ur skouerenn anezhi a vez tu sellet outi e sekretourva An Oaled).

Mennad n° 3 : Gopret e vo hervez Rann **III**, Feur **251** skeul-c'hoproù ar gevrat-hollek.

An arbennigouriezhoù da heul a vo kemeret e kont ouzhpenn :

AFPS BNPS EK All

Mennad n° 4 : Termenet eo ar post-labour evel-henn :

- - prantadoù labour-prientiñ hiniennel pe a-stroll ,
- - plediñ gant ar vugale e-pad ar greizenn.(Kement-se o toujañ spis ouzh al lezennoù ha raktres-desevel an Oaled.
- - labour klozañ e dibenn ar greizenn.

Mennad n° 5 : Kerkent ha sinet ar gevrat-mañ gantañ e kaso an implijad kement paper ret goulennet gant reolenn-veur Ministrerezh ar Yaouankiz hag ar Sportoù.

- - Orin e ziplom(où) (DABU, DARE, AFPS all..)
- - un testeni mezegel o venegiñ n'eo ket spegus e nep doare hag e c'hell labourat gant bugale. (nevesoc'h eget 3 miz).
- - un darn eus testeni-lezennel N°3 (*extrait casier judiciaire N°3*).

Mennad n° 6 : Ne dalvezo ar gevrat-mañ da vat nemet war-lerc'h degemer ar paperioù meneget e mennad n° 5 hag ur prantad-esae un devezh. E-keit-se e c'hello an div gostezenn terriñ anezhi hep kemenn hirroc'h d'eben na tamm difrejañ ebet .

Mennad n° 7 : Dic'hopret e c'hell bezañ an implijad gant An Oaled a-raok ar c'houlz merket evit an abegoù da heul :

- - Mankoù grevus a-fed spered, sevended, emzalc'h.
- - Doareoù pe emzalc'h dañjerus, feulz pe enep-lezenn.
- - Diouer a labour.
- - Divarregezh a-fed labour.
- - Dizoujañs da raktres-desevel An Oaled.

An implijad skarzhet n'en deus droad da zigoll ebet war bouez gopr an devezhioù graet.

Mennad n°8 : Skodennoù ar c'hedskor a vez paeet da U.R.S.S.A.F Penn ar Bed (an Hanternoz) dindan an niverenn : 046 869 91 31. Skodennoù al leve-kenklotañ a vez paeet da gefioù A.G.R.R. Breizh.

Mennad n° 9 : Savet ez eus bet 2 skouerenn eus ar gevrat-mañ ; unan anezho a ranko bezañ kaset d'an aozer en-dro ur wech ma vo bet deiziatet, sinet ha skrivet warni ar gerioù-mañ "*lennet hag asantet ganin*".

Graet e Treglonou d'an **03 a viz Even 2005**

Ar (c'h) gopr (ez) *
Anv Anv bihan

Evit An aozer
Anv Anv bihan

Sinet e : Treglonou..... d'an :

* Skrivañ "*bet lennet hag asantet ganin*"